

CANTIC

EVIT TRANSLATION RELEGOU

SANT PAOL AURELIAN

VAR TON : Savomp or Sperejou.

pe : O vos unanimes.

Canomp oll, Bretonet. canomp gant levez,
 Gloar da Zoue sourcen eus a bep santelez ;
 Canomp enor ha gloar da Sænt coz Breiz-Izel,
 Enor d'o Relegou Santel !

DISCAN.

TON · D'or Mam Santez Anna.

Canomp enor ha gloar
 D'or Sænt coz en Envou !
 Enor var an douar
 Ha gloar d'o Relegou !

—
 Lagad Doue a bâr var an oll draou crouet,
 Mez var corfou ar Sænt dreist-oll e veill bepret :
 Mar d'int bet discaret gant ar maro . . . er bez
 O d'eus evel un eil buez.

—
 Canomp enor ha gloar etc.

Eno, dre viraclou, dre fors ha fors burzud,
E roont da anaout o santelez d'an dud,
Ha moez ar bobl a deu da veza, eb dale,
Moez an Iliz ha moez Doue.

—
Canomp enor ha gloar etc..

—
Corfou ar Sænto d'eus, gueichall, var an douar,
Bet pers en o foaniou : setu perac o gloar
A gommans er bed-ma d'o golo, da c'hedal
Ar varnedig'ez general.

—
Canomp enor ha gloar etc.

—
Tremen trizec cant vloaz or sænt coz so evrus
O rën er baradoz gant om Salver Jesus,
Ac abaoe keit all o Relegou a zo
Enor, gloar ha tenzor or bro.

—
Canomp enor ha gloar etc.

—
Ia canomp, Bretonet, canomp a voez huel,
Gloar, triumph, meuleudi, en deiz-ma solanel,
Dreist oll da Relegou sant Paol, eus a Leon
Abostol, Escop ha Patron !

—
Canomp enor ha gloar etc.

Ed ar veich an Iliz or Mam e d'eus roët
Da Relegou ar Sænt mercou braz a respet,
Ha gant aour, gant arc'hant, gant seiz ha gant
l perlez,
Gret dezo archedou nevez.

—
Canomp enor ha gloar etc.

—
Ouspen, dezo e rent ar brassa enoriou :
Var o beziou e sav templou ac ilizou ;
Bez Patron Castel-Paol a zo e penn ar c'hœur,
Er Gathedral pe Iliz-veur.

—
Canomp enor ha gloar etc.

—
Setu perac en d'eus, Castellis, ho person
Preparet ar gouel-ma eus a Dranslation
Relegou kêr meurbed Sant Pol, mignon Jesus,
En un arched caer dudius.

—
Canomp enor ha gloar etc.

—
Ervez ma voa gueichall ar c'hustum ac ar c'hiz,
An arched-se zo gret e doare un iliz :
Eno e repozo dindan bolzou, d'an nec'h,
Penn ar Sant ha lod eus e vrec'h.

—
Canomp enor ha gloar etc.

Mez piou a zepeigno an arched precius
Ar pez-labour dispar, ken caer, ken ijinus,
Gret evit dig'emer, var un auter savet,
Relegou sant Paol bennig'et!

—
Canomp enor ha gloar etc.

—
Guelit o lug'erni varna an aour melen
An aour liou guer ha roz, guelit caera skeuden
Eus burzudou sant Paol, guelit an daou sarpant
Kizellet ken fin ha ker coant!

—
Canomp enor ha gloar etc.

—
O! sænt coz Breiz-Izel, pedit evidomp oll
Evit na z'ai nicun eus ac'hanomp da goll;
Mez ma zaimp oll, un deiz, da veuli da viken,
An Drindet sacr en ho kichen!

—
Canomp enor ha gloar etc.

F. Brignon

IMPRIMATUR

Corisopit. die Julii 17^a 1897.

F. CORRIGOU,

Vic. Gén.

Landerneau, Imp. J. Desmoulins.